



War-nes mont da get
e oa ar saout brizh
du, daoust ma vezent
kavet stank e Breizh
n'eus ket keit-se zo.

Saout brizh du war hor maezioù en-dro

Anavezet-mat war ar maez e Breizh a-raok ar bloavezhioù 1950, e oa ar saout brizh du war-nes mont da get. En o lec'h ez eus bet lakaet saout Prim'holstein peurliesañ, peogwir e ro ar re-mañ muioc'h a laezh. Evit saveteiñ ar saout brizh du, o deus un toullad labourerien-douar savet chatal gant ar ouenn-mañ. Bodet int en *Union Bretonne Pie Noir*, un doare evito da wareziñ un tamm eus hor glad. Troc'h-kaoz gant Cédric Briand, prezidant *Union Bretonne Pie noir* ha labourer-douar e Plesei, e-kichen Redon.

Petra eo an *Union Bretonne Pie Noir* ?

Ur sindikad-gouenn eo, evel ma'z eus evit ar saout Charolaise, Prim'holstein pe Normande. N'eo ket ur gevredigezh. Merañ a ra ar framm poblad ar saout. Kontrollet e vez gant ministrerezh al labour-douar evel-just, n'hellomp ket ober forzh petra. Kaier ar c'hargoù a ranker doujañ evit kaout ar gwir da implijout anvadur orin ar saout. Diorroet ez eus bet un eil tra ganeomp : ar pezh a denn d'ar brudañ, d'ar c'helaouiñ, evit lakaat an dud da anavezout ar saout brizh du, ha da zebrñ ar produioù graet diwar o laezh hag o c'hig. Reiñ c'hoant da labourerien-douar all da sevel saout brizh du eo ar pal ivez. 300 saver chatal omp en *Union Bretonne Pie Noir*, an darn vrasañ staliet e Breizh. 70 % ac'hanomp zo tud o deus ul loen-saout pe zaou, evit o flijadur, amatourien int ur seurt. Ar re all a zo tud a vicher, da lavaret eo e c'hounezont o buhez gant ar saout brizh du.

War var da vont da get e oa ar saout brizh du ?

Ya. Er bloavezhioù 1970 ne oa tost penna-saout brizh du ebet ken rak ne veze ket roet a-walc'h a laezh ganto. Padal, e oa ar saout a veze produet ar muiañ e Breizh a-raok. Pa oa bet lakaet ur patrom-standard er bloavezhioù 50-60 e oa bet kavet

Evit gouzout hiroc'h ha kavout produioù graet diwar laezh ha kig ar saout brizh du : WWW.BRETONNEPIENOIR.COM

gwelloc'h gant al labourerien-douar kaout chatal Prim'holstein pe gouennoù evel-se. Eus un niver bras a-walc'h ez omp aet d'unan bihan-tout gant 400 buoc'h-laezh nemetken. Ar pezh n'eo ket kalz, e mod ebet. Ar saout brizh du a oa un tamm evel pezhioù armelioù Breizh hag a zo bet skarzhet gant ar pezhioù arreburi formika !

Saveteet eo ar saout brizh du bremañ ?

Mont a ra kalz gwelloc'h, ya. Ur steuñv adlañsañ a zo bet savet ha lakaet e pleustr. Ur rouedad ingalañ zo bet savet tamm-ha-tamm. 1 500 buoc'h a zo hiziv-an-deiz, gant perzhioù genetek liesseurt-mat. Hir eo saveteiñ ur ouennad saout. Buan o deus komprenet ar broduerien saout brizh du e oa ret dezho treuzfurmiñ al laezh o-unan, ha kinnig produioù gant gwerzh ouzhpennet. Evel formaj, amann, ar Gwell* pe kig evel-just.

Un doare all da welet al labour-douar a vez kinniget ganeoc'h neuze ?

Ya, anat. Ganeomp n'eus atant bras-divent ebet. Ur sell all hon eus war al labour-douar. Ul liamm kreñv a zo etre ar broduerien hag o loened. Hag etre ar broduerien hag o fratioù ivez. Gwerzhañ a reomp hor produioù war-eeun, en tiezeur pe war ar marc'hadoù. Doujañs hon eus ivez evit an endro ha teurel a reomp



Gant ar sindikad e vez brudet ar boued aozet gant laezh ha kig ar saout brizh du.

evezh ouzh ar vevliesseurted. Tost an holl ac'hanomp a zo dindan al label bio da skouer.

Petra a blij deoc'h er saout brizh du ?

Ul laezh diennek-tre eo hini ur vuoc'h vrizh du. "Buoc'h an amann" a veze graet anezhi. N'eo ket dre zegouezh ez eus eus sevenadur an amann e Breizh. A-drugarez d'ar saout brizh du eo. O laezh-koaven a zo a bouez evit fardañ amann. Ur vuoc'h giz kozh eo ouzhpenn-se, aes da ouennañ hag a c'hell mont da gozh. Speredek a-walc'h eo ivez ar vuoc'h gwenn-ha-duse. N'heller ket he lakaat d'ober n'eus forzh petra. He zemb-spered dezhi he deus ! Ar pezh zo plijus-tre.

Komzoù dastumet gant J.B.

1. Gwell : anv merk ur c'hoaven aozet gant laezh-goedenn, d.l.e. laezh lakaet da gaouledañ, a reer "laezh-tev" outañ ivez (*gros lait*)